

64

## Songesonou Christen

Var ar maximou dangerus a essaer aboe nebeut da  
laqat da rën en hor c'hontre .

(398, suite)

Var ton : Me meus eur mab Sylvestric .

Speret eus a vouirione , sclêrait va speret,  
Ma essain rei qelen d'am breudeur Bretonet,  
War maximou dangerus a glasqer da sila,  
Dindan ur fals-appearanç , partout dre ar vro-mâ .

Ne zeus netra qer tromplus evel ma zeo an den :  
Gant comzou douç , gracios , bepret e clasq antren  
En sperejou an dud sempl , pere er selaou re ,  
Hac a glasq ober dezø renonç d'ar virione .

(399)

Digant piou en deus pouvoar an abostol neve  
Da zonet da brezegui e greden d'hor c'hontre ?  
Goulennit outan hardi petra eo e goctin ,  
Hac er zo bet digasset abers hor Meste divin .

Petra eo ar seurt levriou a velan en ho tej ?...  
Ha c'houi ve qen disqiant hac ive qen hardi  
Da preferi da hini levr sacr an Aviel,  
Levriou a zo condaonet gant an Tadou santel ?

Pa deu en ho parqeyer louzou fall da bousa,  
E tleit , hep differi , dont d'o disc'hrienna ;  
Er memes tra e renqit difframma evelse  
Ar maximou dangerus a glasq coll hoc'h ene .

Ferm vel ma tleit beza evit souten ar Feiz,  
O va breudeur en Doue , christenien eus a Vreiz ,  
Pellait oll diouzoc'h maximou dangerus,  
Ha bezit atao fidel da lezen sacr Jesus .

(400)

A feiz vad , ha c'houi gredfe da rêzoniou qer fall ?

Interrojit ho calon, hac e teuy d'ho tamal  
 Da bresta attantion da un den dirëson,  
 Pehini, dre langach faus a glasq trompl ho rëson.

Rac, ret eo bezza trompler, pe caout nebeut a benn  
 Evit clasq ober chench feiz, etouez ar gristenien.  
 Ne zeus den, a dra certen, a gredan, a deufe,  
 Evit credi diotach, da risca e ene.

En ascre deus an Ihs e mäs ar virionez;  
 Ermes demeus an Ihs nemet erroi na vez.  
 Guelet a rit scler patant, ebarz ho cathedris,  
 Ne zeus nep silvidiguez, ermez eus an Ihs.

Ho creden a zo dertan, a drugare Doue,  
 Hac a vezo da vigen, qeit ma viot en bue;  
 Rac credi rit a galon, evel ar c'henta tra  
 Penos an Ihs n'ell get trompla, na n'em drompla.

Ja, bete ho maro, c'houi gredo a galon  
 An oll maximou santel eus hon Religion.  
 Neus fors petra lavarar james enep dezji,  
 Nan, james nep confianç n'ho pro nemet enni.

(401)

Ho creden a zo fontet var rësoniou certen,  
 Var oraclou an Ihs, var feiz ar verzerien.  
 Ja, qen assur e zoc'h eus a fermder ho feiz,  
 Evel ma zoc'h assuret e verit hirio 'n deiz.

Guelit hor adversour pequen doucic ha tra  
 Gant comzo douç, gracios, o tout d'en em sila  
 Etouez famillou kristen, gant un ear hypocrit:  
 Biscoas den, ouz en selaou, n'en doe mui a verit.

Mes c'houi, ferm en ho creden, a dle respont dezän:

- 1) Pellait, fals-abostol, tec'hit ouz an ty-män....
- 2) Ministret hon auterion a voar mad hor c'helen;
- 3) Retormit d'ho pro soudan, respetit hor c'hreden.

- 4) Ni vo fidel da vigen da lezen an Ihs,
- 5) Evel ma zeo bet disqet d'emp en hor c'hatekis.

» Bepret e vezimp fidel d'ar giir religion,  
 » Ha d'e oll gourc'hemennou e sentimp a galon.

» N'ellomp caout nemet horrol ouz ho comzou tromplus.  
 » Pellait, ha respetit giir vugale Jesus.  
 » Ho levriou pernicious, hoc'h oll gomzou impi  
 » A sellomp evel pechou stignet d'hon zrompla-ni.»

(402)

Sellaouit Jean-Jacq Rousseau, n'eller get sur accus  
 Da veza bet meuler bras eus a lezen Jesus:

« Pignomp, emezan, betec an amzer da guenta  
 » Ma teuas ar brotestantet deomp d'en em discleria.

» An ilis universel a voa en peoc'h dre oll,  
 » Pa gommancjot da sqigna o maximou dirol.  
 » Daou pe dri den egaret dre an Europ a red,  
 » O clasq fonti eus greden gant an oll reprovret.

» Oh! christenien, emezo, ni ho ped, evesset;  
 » Laqit eves, ho trompla a glasqer en effet:  
 » Ar nab zo an antechrist, ha suppot da Satan;  
 » E ilis scol ar quevier ha templ d'an derouant.»

—« D'ar c'hriou fafanus-se, cabz a voe estonet,  
 » Hac ur moment, en silanç, na vouiet petra ret.  
 » Anfin, ministret Doue, deut demeus o sebez,  
 » A gomprenas e voa poent prezeg ar virionez.

» Goulen a rejot oute petra voa o reison  
 » Da zont d'en em discleria enep hon religion;  
 » Mes qerqent e respontjont, gant un ear effrontet,  
 » E zoant deut da reformi an Ilis dre ar bed.

(403)

» Ar vèleyen, emezo, a glasq trompla 'r bed tout...  
 —« Pieu, eme hor bèleyen, en deus roet dec'h gallout  
 » Da zont da droubla 'r Ilis hac e zranquilité?»  
 —« Hor c'houstonç, emezo, hac ar vouez a Doue...»

—« Gant Doue oc'h-ta digasset, eme 'r gatholiget?  
 » 'Ar se e convenomp sur e tleer ho clèvet;  
 » Mes evit caout an droat-se, disquelit deomp bremâ

» Hoc'h ordrenañ a greden hac e credimp ennã.

« Mes ar reformatourien na eljont respont quer,  
 » Rac n'o devoa da brouvi netra nemet quevier!  
 — a Ni eme 'z gatholiget, 'zo en possession,  
 » En hano eus a Jesus eus ar religion. »

Grit ar memes goullennou demeus an heretiq,  
 A glasq d'ho laqat renonç d'an ilis catholig,  
 Ha bezit neuze certen penos na veezo get  
 Rei eur rêson talvoudec nac adreus nac ahed.

(404) An den savant Pacien, en eur gomz diouto,  
 A c'houlen e pezh contre nac ivez e pezh bro  
 O deus rentet ar quielet, ar c'hlevet, ar c'herzet,  
 Ha ped eus a dud maro o deus ressuscitet.

Piou benac en em bresant dindan autorite,  
 Na dle get sur pretanti ve var e gomz e ve  
 Credet qement a zebit, hep nep preuven ebet,  
 Ma na brouz pantantamant e tle beza credet.

Moyses a brouvas e zroad el lezen ancien,  
 Er memes tra ra Jesus, hor Zalver souveren;  
 Dre brodijou eclatant e tisquijont neuze  
 Penos e voant digasset demeus abers Doue.

Lavaret vo martèze gent nebeut santimant  
 Eo ar religion catholig meurbet intolerant;  
 Mes enep piou? m'er goulen: a enep ar sectou,  
 A enep an oll quevier hac an heresiou.

(405) Nan, na dle get toleri, ha na vez get santet,  
 Na dign demeus a Doue nac eus an Ariel,  
 Mar permetfe ar pezh 'zo condamnet gant Doue:  
 Na dle get souffr ar quevier e plaz ar virionez.

Speret Jesus-Christ a zo eur speret a zouzder,  
 Eur speret a vadelez, a garantez tener,  
 Pini a glasq unani d'e galon e-unan  
 Calonou ar gristèrien demeus ar memes tan.

Rac, herves Sant Athanas, piou benac a brofes  
 Ar religion dre fors, n'er brofes tam memes :  
 Ur galon simpl, volonter, a blich calz da Jesus ;  
 Se eo ar religion hac ar stat evurus.

Ho tad, ho mam, ho qerent a zo bet baderzet,  
 Hac en asgre an Ihs gant Doue recevet.  
 Beza zeus den disqiant capabl da renonci  
 D'ar bonneur zo preparet en êe evidomp-ni ?

Hac ho prez-hu coumettet ar brassa pec'hejou,  
 Doue, leun a vadelez, a bardon d'ho crïmou,  
 Sepet, evit o effaç, ma rest pinigen,  
 Ha ma vezot qeurjett mad, vel a dle jeb christen.

Er stat a zallidiguez ma zoun, ô va Doue !  
 Ec'h imploran diouzoc'h sclerijen d'am ene,  
 A enep an dromplëson a zo hirio o ren,  
 Hac a laga an troublïen etouez ar grïstïenien.

(406)

Ni zo bugale Doue hac ive d'an Ihs,  
 Ha neus qet evidomp-ni netra a vrassoc'h pris  
 Equet heuill hed hor buez oll furnez ho lezen,  
 Hac en em disfiout atao ouz hon adversourien.

Ar Fur a lavar : « Va mab, en em disfiit bepret  
 » Demeus certen discoursiou a ve d'êc'h debitet. »  
 Ar bordou deus eur vessel gant mel a ve frottet,  
 Mes ar fonz deus ar vessel a zo ampoesonet.

Un dallentez e ve d'êc'h donet sur da gredi  
 Eo balamour ma teuer da zont d'ho conseilli,  
 Pe da zifen diouzoc'h un dra zo dangerus,  
 Ho poa c'hoant da danvea, na ve qet d'êc'h noazus.

C'houi, tud fidel ha docil d'ar vouez eus an Ihs,  
 Pa zeus danger evidoc'h, heuillit mad va avis :  
 Tec'hit an doctrin nevez, en em disfiit a grenn  
 Deus an oll dromplësonou enep d'ar guir lezen.

En em instruit etrezoc'h a vaximou ar feiz,

(407) Ebars el levriou santel a offerer d'êc'h b'emdeiz ;  
 Hanzavet gant an ilis, leun a gonsellou mad,  
 E pere ec'h ellit oll en em instrui errad.

En deit ma zeot en hent eus an humilité,  
 E vezot assured mad da vont e sureté.  
 Rac o vont gant assuranc' en hent-se qer parfot,  
 Hac o credi a galon, e viot sur salvet.

Pequen eurus e ven-me, m'am bez-me ar bonneur  
 Da zicour ar virionez da antren em breudeur,  
 Dre ar reflexionou a bresant'ân amâ,  
 Erit ar bonneur commun partout dre ar vro-mâ!

Oh! ma elfen ho laqat da gredi d'am c'helen,  
 Pez plijadur am bez-me, va breudeur cristenien,  
 Ouz ho quelet o pellât diouz oc'h tromplerien,  
 Na glascont nemet droucranç etouez ar gristenien.

Goulenomp digant Doue graç ar berseveranc',  
 Ha da gresqi ar gvir Feiz e rouantelez Franç;  
 Ha ra vezo hon nizien, un deiz, avoalc'h eurus  
 Erit quelet dre 'r bed oll o rên lezen Jesus!

(408) Prosternet ouz treid Jesus, pedomp-ê'n a galon,  
 Ma vezomp bepret fidel d'ar gvir religion:  
 Unanomp hor pedennou erit ar gristeniach,  
 Hac offromp a greiz calon da Zoue hon hommach.

A. L.

(Vol. VI, p. 398-408.)  
 45 str. numérotées.